



# DISPUT

## ENTRE

### AR CHRISTEN HAC AR PAYEN.

---

Var an Ton ordinal,

**O**LL Gristenien, deut da glevet  
 Eur cantic nevez composet,  
 Evit o cana noz ha de,  
 En gloar, en henor da Doue.

Canet-i ha me e c'hlevo,  
 Ma deoe util me e disquo,  
 Hac e cano gant eur guir fé,  
 Mar de agreabl da Doue.

Agreabl e voe, na doutet den,  
 Hac util bras da bep christen;  
 Hac en clevo ar goulenno,  
 Touchant dar fé ar responcho.

Un heretic hac eur christen  
 O comz divar ben al lesen,  
 O prezec diyoar ben ar fé,  
 Ha penos servigin Doue.

**S**ALUD dec'h, e me an hereticq.  
 C'hui a so eur christen catholicq;  
 Ispliquet din un dra er vad  
 Doue al lesen Doue on tad.

Goulen a ran mar intentet  
 E vit petra on deut er bedt?  
 Ispliquet dime gant ræson,  
 Rac facil e ma question.

Da anaveout ha da servigy,  
 Da garet ha da enory  
 Un Doue ep quen eternal,  
 En bue-man, hete mervel.

Pe sort recompanç a esperet  
 Goude bean en servichet,  
 Caret, enoret evel-se?  
 Petra a po digant Doue?

Esper am eus, mar ben fidel,  
 Cavet ar vue eternal;  
 Cavet graç Doue var ar bedt,  
 Hac e gloar a fin ma decet.

C'hoant am eus da garet Doue,  
 C'hoant am eus gout pelec'h e ve;  
 Pelec'h e aman a pe guis?  
 Biscoas en goelet na elis.

Doue a so crouer dan eëvo,  
 Ha bed oll dan oll dan anror,  
 A so en pep lec'h dre e presanç,  
 Dre e graç divin ha puisanç.

Mar en ma Doue en pep lec'h,  
 Evel ma intentan guenec'h;  
 Hac en e ve en ifferniou,  
 En tan en touez an diaoullou?

Certen e man en ifferniou ;  
 Mæs na soufr na tan na poanniou,  
 O puissanç ! ar-re daonet  
 Abalamour m'ho deus pec'het.

Eur boan bras em be o cridi se  
 E ve en tan na ne rost quet :  
 Espliquet din gant guirione  
 Penos e c'hoarveset an dra-se ?

Doùe so un intellegeanç scler,  
 Eur speret eo pur ha liger,  
 Dispartiet na ne el quet,  
 Souffri anquen na poan abet.

C'hoant am eus ha me a gare  
 An Drindet gout petra e ve :  
 Comz anean am eus clever,  
 Mæs en annaout ne ran quet.

En Drindet a so tri person,  
 Distinct, divin, en eun union ;  
 An Tad, ar Map, ar Speret gloan,  
 Tri ferson int en eun unan.

Leret din nac an union  
 A so entre an tri ferson,  
 Pini anei eo ar c'hoassan,  
 Ar furra, ar puissantan ?

Quen coz, quen fur ha quen puissant,  
 Quen mad eo an Tad evel ar Map,  
 Hac ar Speret gloan ingal gante,  
 Ne reont nemet eun Doue.

C'hoant em eus ha me a gare  
 Jesus gousout pelec'h e ve :  
 Pelec'h e man na pe en guis ?  
 Biscoas en goelet na ilis.

Jesus a so bars en eëvo,  
 En e gloar, en e brassa joayo,  
 Hac en auter ar sacramanti,  
 Er spes a vara hac a guin.

Leret din petra eo ar sujet  
 Ma n'eus bet Jesus teurveet  
 Chom er sacramant an auter :  
 Hac en voa un dra necesser ?

Necesser voa pa eo chommet;  
 Doue ne ra netra nac imparfet.  
 Evit mesur on eneou  
 Ha derc'hel memor deus e maro.

Evit prouv eo ar garante  
 En devoe Jesus ha true  
 Da vean bet marvet er groas,  
 Goude souffri injuriou bras.

Ouzoc'h, ouzin hac ous pep den  
 Na so bet nac a vo biquen,  
 Aboe Adam, hon tad quenta,  
 Betec ar fin deus ar bedt-man.

Pedomp Doue a vir galon,  
 Dre verito e bassion,  
 Ma c'hefomp goude on bue mortel  
 Jouissan deus ar gloar eternal.

F I N.

